


# POBL VREIZH

DU 1979  
NIV. 117

4<sup>¢</sup>



**HARPIT  
POBL VREIZH**  
KRP 2746-79 ROAZON  
CCP RENNES

6\* listenned

Fañch Le Bleiz	
Croisy-s-Andelle (76)	40,00
Dishanw, Lannilis	50,00
D. Nioz, Angers (49)	20,00
A. Louarn, Roazon	10,00
J. Guillou, Kemper	60,00
	180,00
Diwar al listennadoù all	2140,00
War-un-dro	2320,00

\*\*\*

Berr tre eo roll hon profourion er mis-mañ : red eo bet dimp klosañ al listenn abred tre, dre ma faote d'hon mouller kaoud pennadoù Pobl Vreizh un tamm mat a amzer araog re ar Peuple Breton, kuit da stankañ ar gorzenn...

Ne vern : gant gwazhioù bihan a vez gwraet steroù bras, e-gis ma lavarfeomp e galleg, Ezomm zo eus ouzhpenn ur wazh, anad eo...

Dindan berr e kresko pris Le Peuple Breton, anezi ur gelaouenn a 32 pajenn : eus 4 L e vo kaset da 5 L. Chom a ray Pobl Vreizh er pris kozh. Ne chom en he sav avad nemed gant ho profoù, lennerion ha komanterion ger. Ya, gant ho profoù, e lekait, dre vras, ar gaserion da 5 L an tamm iwe. Trugarez vras deoc'h ewid ho skoazell.

Klaskit komanterion newez memestra. Lakait Pobl Vreizh da vezañ anavezet e touez ar re a oar brezhoneg un tamm. Red eo boueta ar vrezhonegerion gant pennadoù fannus, politikel ha kulturel, e brezhoneg yac'h ha bew. Fiziañs hon eus e vez roet e c'hoant da beb hen... Ekeñver roll an arc'hant neuse, hon eus fiziañs iwe hon devo brassoc'h tamm a-benn ar wech a zeu...

Pobl Vreizh

**KOMANANTOÙ**

P	boutin : 40 L	V
O	skoaz : 60 L	R
B	pe ouzhpenn	E
L	KRP ROAZON	I
	2746-79	Z
	C.C.P. RENNES	H

Tri-Moullerezh = Iroise =  
29200 Brest  
Renner ar gelaouenn  
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 091  
1700 skwerenn

**LENNIT  
POBL VREIZH**

**BRETONED, GANEOC'H  
EMA AR GOMZ !**

**Roll-goulennoù**

	Diverkit ar respontoù a seblant deoc'h bezañ diwir	
1. Penaos ez a ar bez ganeoc'h ?	Fall	Kentoc'h fall
2. Petra a ya mad awalc'h, d'ho soñj ?		Mad awalc'h
3. Petra zo da gavoud abeg ennañ, d'ho soñj ?		Mad
4. Disheñvel eo Breizh diouzh ar rannvroioù all e-keñver stad an traoù enni ? Ma 'z eo disheñvel, perag ?	YA	N'EO KET
5. Daoust ha Breizh eo dezi gortos un amzer da-zont gwelloc'h ?	YA	N'EO KET
6. Peheni (pere) eo ar brassañ chañcha-mant(où) a vefe da zegass an hon bro ?		
1		
2		
3		
Kass ar respontoù da : Jakes DEBOS UDB BP 304 29273 BREST-CEDEX.		
C'hoant 'm eus da gaoud disoc'hoù an enklask-mañ. O c'hass d'an adress-mañ :		
Plijoud a rafe din ressew epad 3 mis ewid netra		
	Pobl Vreizh	pe
	Le Peuple Breton	

Komanant d'ar gelaouenn bolitikel nemet e brezhoneg penn-da-benn  
**Pobl Vreizh** (service abonnements \*)  
BP 304 - 29273 BREST-CEDEX  
Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gas e gomanant  
Boutin : 40 L (1)  
Skoaz : 60 L pe ouzhpenn (1)  
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant  
dre chekenn-bost (1)  
dre vandat-lizher (1)  
dre chekenn-vank (1)  
CCP RENNES 2746-79

(1) Diverkit ar gerioù na servijont ket  
\* da vezañ dre red war ho kolo lizher



Ar gomz d'ar Vretoned, ha n'eo ket heñvel war ar ru, ur wech ar mare (evel amañ e Naoned), mes ingal : red e vo dezo tapoud krog e-barzh ar rod-stur, ha bezañ mestr en a bro, ewid gelloud bewañ eurus enni.

**POULAOUEN : UR GWALL STANK WAR STÈR AON**

Fin mis Gouhere : ar voadeg gwraet gant an DDA ha « sindikad deureier ar Stêr Aon » a ra da c'houde da dud ar vro ha d'ar goñsallherien e vo stanket ar stêr da vad 'kotez Lemezeg, etre Skrignog ha Poulaouen. Mann ebet newez eta. Netra da vezañ souezhet : J. Rohou, e lître nann d'ar stankell araog ar vot diwezhañ, a c'hañch tu d'e c'heppenn rakital en ur isplikañ : « delc'her a ran da lîred ya d'ar stankell-se... A. Penven, maer an Uhelgoad, hag an Andrew, maer Skrignog, a ha da heul...

D'ober Petra ar stank vras-se neusen ? 12 milion m3 dour, 18 metr dander ! Da reiñ dour da Boulouen... ha da Gares (n'o deus ket ezomm), da drañ Kernew, med pas d'an douarid, nann ! An Aotrou Guyader-Desprez, maer Kastellin, a sav a-du : « Talvoudus 'vo ar stank ewid kêr Kastellin, ken brudet evel a ouso'h e-mesk ar basketerion... Tud 'vod, toud, tud 'fesson, tud 'zoare, ya, an aotred-se !

Mis East : louset ar stêr Aon gant kouevr ho zing deus Doloseg, 'lec'h eo bet ar BRGM o klask mein sort-se ban dour. Marwel a ra millerioù a bakad... peour-kreizh pesketerion ! Ha koustkoade, goùd a ouz tud ar vro abaoe pell zo e oa sañset an dra-se d'arvui... ha degouezet e oa dija, tri bloaz so, pe oa marw toud ar peskad ha Krec'h-Niver Skrignog.

Skrivet 'oa bet ul lizher d'ar profed memes ; hemañ en doa respontet (Mis

Mae) ne oa riskl ebet, war e veno, ha « ma zegouezfe traoù lous bar stêr, he defe ar stank un ofed vad » !!! Un den fur, un den gouest eo ar profed.

Mis Gwengolo : ansav a ra EDF da Quest-France (8-9 a vis Gwengolo) e vo ezomm kalz dour doubs ba Plogo (7000 m3 bemdez), med ne raont ket bilou, abalaouere e roio sindikad ar stêr Aon dour dehe, pash a garint, hag e vo prest an traoù heb dale...

Setu, ur stank pell re vras ewid reiñ dour da evañ da dud Kernew. Ya, ha ne vern ket pe lous pe sklaer a vo...

Aessoc'h eo kompren jao pennoù bras ar vro, koulz ha kompren an Aotrou Profed... ma servij an dour da Blogo.

Gwazh-a-se ewid an dud gloukas awalc'h da gaoud kred e-barzh ar c'hamzoù flour-se. Gwazh-a-se ewid bro ha tud Lemezeg, siwazh !

Ar Pesketer

**DA GENLABOURERION « POBL VREIZH »**

Ur pennad zo dija amañ Le Peuple Breton, kasetenn c'halleg an UDB, ar memes ti-moullerezh ha Pobl Vreizh, « Iroise » e hanw. Dre vras e teu an diw gasetenn ar-maes ar memes mare : e deizioù kentañ ar mis. Marteze ne oar ket hon lennerion e vez diviset gant Burev Politikel an UDB peheni 'vo danvez an eil gasetenn hag eben. Diviset a vez iwe gantañ peheni 'vo ar pennad-stur : ar memes heni a vez hemañ en diw gasetenn, war-boues nebeud, petra honnag ma vez disheñvel yezh an eil diouzh heni eben eveljust. Mes un tammig bec'h a vez war dud an ti-moullerezh e fin ar mis, pa vez red dezo lakead an diw gasetenn da zont

ar-maes wardro ar memes amzer. Setu eo bet kavet gwelloc'h lakead un tammig distok e-barzh ar mekanik, ha kuit da stankañ ar gorzenn, a tey Pobl Vreizh ar-maes, diwar vromañ, araog Le Peuple Breton. Mes neuse e vo red deomp kaoud ar pennadoù, kementadoù, lizheroù a ya d'ober Pobl Vreizh d'AN 10 EUS BEB MIS D'AN DIWEZATAN.

Pedet eo eta hon kenlabourerion da deulur svezh war an tamm chañchamant degaset, ha neuse lakead o traoù e-barzh bouest lizhiri ar PTT a-benn AR 7 EUS BEB MIS.

Dalc'hit soñj neuse, kenlabourerion ger, ha dao d'ar pluennoù !

## 4<sup>e</sup> RUMMAD DEWEZHIOÙ-STUDI AR CIEMEN

E **Prada** (Katalonia an Hanternoz, e galleg **Prades**, departamant Pireneoù ar Reter) eo bet dalc'het ar bloaz-mañ adarre dewezhioù-studi ar CIEMEN. Tolvezoad a ra CIEMEN, e kataloneg, kement ha « Centre international Escarré sobre Les Minorités ethniques i nacionals ».

**Escarré** zo hanv un den, nebeud anaezet dre amañ maouez. Bez ez eus bet anezhañ abod Abañ brudet **Montevral**, e Katalonia ar C'hreisteiz, er Stad spagnol eto. Bet eo bet **Escarré** unan eus ar re-gentañ o sevel a-eneb da **France**, ar c'h/Cou-dillo doune-se. Ewid meur a obeg e savas **Escarré** a-eneb da **France**. Abalamour ma oa un diktatour. Abalamour ma oa o klask mougall ar c'hataloneg ha lemel he frankisoù digant Katalonia. Abalamour ma roe da c'houzout e oa anezhañ ur c'hatolik mad, pa lavare **Escarré** e oa oc'h ober un implij politikel eus ar relijion gatolik, h.a., h.a. Ne blije ket da **France** tamm ebed bezañ dislabret. Dreistall gant ur beleg, un Abod, da larede eo un eskol-kassant. Tularet bras ar generalismo eto. Ne chelle ket kass **Escarré** d'an toull-bac'h, peogwir e oa un C'hanokard e Bro-Spagn etre an ilis hag ar Stad, ha douzet ma oa o ilis-ekibenn Spagn d'ar c'houzout-se a-du krenn gant **France**, e vije bet gwali zanterus ewit barn **Escarré** diouzh lezennoù ar Stad (ha n'eo ket drouz re an ilis) hag henn toull-bac'h. Kavoud a reas an disober anezhañ ouz henn harluak. En harlu eto, e Bro-tali, eo bet marv **Escarré**.

Warn hanv un den brudet dre Vro-Spagn a-bezh ewid bezañ talet douz **France**, e rikouez fraezh ar gresenn disezet e **Prades** war bezant lu eo reteret. Hag eno e teu neuse, heb bloaz oalch'h bremañ, tud eus meur a « vroadelezh heb Stad », e-gis ma lavar poadred ar CIEMEN. Daou benn he deus ar gresenn-mañ : ur penn kulturel hag ur penn politikel. Rag anod eo n'heller ket dispartañ krenn kudennoù ar c'hulturel diouzh re ar politik, dreistall pa ouer erwad n'eus diskoulm ebed d'ar re-se en diavaes eus ur politikerezh eo kenkouz larede ez eo an **emmenestr** (d'an nebeutañ) ewid ar broaddezhioù-se.

Daveze an dewezhioù-studi a oa ar bloaz-mañ : « Yezh, divroac'h, tochen-

vro ». Al lodenn vrasañ eus ar gomparonezh a oa Katalonia memestra, mes douz hebken eus Katalonia an Hanternoz ; eus **Barcelona**, **Valencia** hag an tri-droadio anezhañ e oa ouzhpenn an 2/3 eus an dud, hag ive eus an inizi **Baleares** ; Euskaris ive, Okzitans, ur Flandresad (Stad Belg), tud eus ar **Friol**, eus **Transilvania**, eus **Sardegna** ha eus **Gallisie**. Hag, ewid ur wech kentañ, ur Breton.

A-c'haolad etre ar c'hulturel hag ar politik e oa ar jeto eto. Eizhez eo podet an traoù (eus ar 16 d'an 23 a vis Eost), ha d'ur « broaddelezh heb Stad » eo bet goustlet peb heni eus an eizh dewezh-se. Gant ur brezegenn (a deir eurvezh) e rigore an abodenn diouzh ar boure, ha goude kreisteiz e kroge ar c'hendivis etre ar prezegenn hag ar genalc'hidi. Dre ma oa ar re-mañ, war-boues douz, eus Europa ar C'hreisteiz, e oa ur wech kentañ dezhañ kledwed komz eus Breizh en ur mod fonnus oalch'h, hag en ur vont en tu all ar brezh-vuderezh a ra d'hor bro re an FLB. Eus hemañ ez eus bet hanv forzhig, Euskaris o vevañ a-du oalch'h gant ar stourm armet ewid a bro-iti, hag o kredid e oa hevel stad an traoù e peb lec'h. Forzh-pagen hir e vo an hent digoret gant an UDB, en deus ar prezegenn breizhad roet da gompren d'e sebourerien n'eus ket plad dre amañ er mare-mañ ewid stourm kuzh un arme ken kuzh all. Tommoch eo marrese gwad kreisteiz, pe marrese e meur a « vroadelezh heb Stad » e c'hell ar emskant vroadel bezañ bewc'h eged amañ. Forzh penaos, mard eo bet chomet ar brezegenn war dachenn danevez an dewezhioù-studi.

« Yezh, divroac'h, tochen-vro », epod ar c'hendivis ne oa harz ebed d'ar goulennoù, hag a deus ewiste kendalc'hidi ar CIEMEN gwaer anoudegezh, pe welc'h anoudegezh, gant ur vro, ur babl, ur yezh ha kudennoù na ouent ket beuz nete kolz traoù diwar a fenn. Ewid ar Breizhad oet di, ez eo bet an dewezhioù-studi talvoudus ha fraezhus ive, ouzhpenn m'eo kour meurbet kor-br **Prades**, mening ha glas drouz-troad ar c'h **Canigou**, peurliesañ heollet un dud, en desped da wali varroudu an awel yen, lemm ha rust meurbet a ra tud ar vro **Transilvania** anezhi.

F. Marvannou



Daou archer o vont d'an ofrenn war ar abid archerien ? E-pelec'h emaoamp amañ ? Petra zo en em gavet ? Ar respantou (mad pe get) a vo embannet war b/Pobl Vreizh. Bec'h d'ar pluennoù !

## Skol dre lizher « AR FALZ »

Bez ez eo Skol dre lizher Ar Falz unan eus skourrou pedagogel emsav Ar Falz (skolaerion ha kelennerion laik Breizh), emsav disezet e 1933 gant Yann Sahier.

Ober a raer gant al levr « Ar brezhoneg didor », embannet gant Assimil : da vevañ prenet ganeoc'h e ti ho levrier.

N'eus ket da beañ ewid ar c'hentelioù, ur wech prenet al levr ha lakaet ur timpl bewc'h war ar golo-lizher ma vo kaset dooc'h en-dro ho kentelioù difasiet.

Bez ez eus eus ar c'hentelioù en o fezh 11 poelladenn dre skrid, ma tenn peb poelladenn d'ur rummad 7 kentel eus al levr. Labourad a ra ar skolidi peb heni gant e lañs e-hunan, buan pe goustadig 'vel ma kar. Arabad dooc'h ankouad kass bewc'h, gant ho poelladenn, ur golo-lizher, un timpl outañ, ha warnañ ho hanv hag hoc'h adress.

Kaset e vo ar poelladennoù en-dro dindan 10 dewezh epod ar bloavezh-skol.

Doare-kelenn etrerannyezhelel, fonnus an notennoù ennañ, ez eo Ar brezhoneg didor ur benveg dispar etre daouarn kemend heni, o c'houzout ar yezh pe o klask he deskiñ, hag a fell dezhañ deskiñ komz, lenn ha skrivañ ar brezhoneg. Savet eo bet kentelioù brezhoneg Ar Falz ewid kement heni a fell dezhañ en em varrekaed war ar brezhoneg, forzh penehi e vez e barlat a orin, ma vez d'ja un disterrañ tamm brezhoneg en e ziwskouarn. Ewid a re a grog da zeskñ ar yezh, e c'hell ar gelennerion roñt dezhañ titouroù a beb sort m'o deus c'hoant mont donnoc'h en ur rannyezhe bennag. Arabad teuler a-gostez ar gwenedeg — ar pezh a vez gwaer re alies —, ur rannyezhe ken dibar he ferzhioù dezhi. Pedet eo ar skolidi a zo o chom e-barzh lodenn vrezhoneg ar Morbihan (lakaet er maes kantoniou Gourin hag ar Faoued) da zeskñ da gentañ ar gwenedeg, ar rannyezhe a vez komzet tro-dro dezhañ. A-drugarez d'an doare-kelenn etrerannyezhelel, ne vo ket dioes dezhañ, war-lerc'h, stagañ gant ar rummad bras all a rannyezhoù, ha dont da vevañ barreg tamm-ha-tamm war ar brezhoneg en e bezh.

Ewid lakaad e hanv pe goulenñ titouroù all ouzhpenn skrivañ da : Skol dre lizher Ar Falz Albert Deshayes, 15 Hent Bras Breizh 29000 Kemper.



Lusker an « Talbenn » eo ar Falz. Amañ un nebaud pennoù bras eus an emsav sewenadurel-se : Ivon Prouff, tefsereres (reneres CEG Plouneour-Menez), Ivon Coz, presidentes (kelenneres e Skol Normal Naoned), Per Rhun, e karg eus ar gelaouenn Skol Vreizh (kelenner e Skol-Veur Naoned), Per Honore, eil-sekretour meur (kelenner e Montroules), Paolig Kombod, sekretour-meur Ar Falz newez aet e karg (kelenner e Montroules). Gant ar Falz eo eo bet lañset an « Talbenn ». Mes labour ar Falz zo dreistoll dedennañ ar skolaerion hag ar gelennerion dindan Stad trema ar c'helenn brezhoneg ha trema kement a ra sewenadur Breizh (istor, douaroniezh dreistoll). Ur gelaouenn bedegogel o deus re ar Falz, « Skol Vreizh », danvez enni e-leizh. En tu all da se eh embannet ive ar gelaouenn « Ar Falz », anezhi ur gelaouenn a stourm, ha, newez so, o deus kroget da embann ur gelaouenn sewenadurel e brezhoneg penn-da-benn « Planedenn », ma c'hell al lennerien anezhi kluchañ didor war neptuegezh vlod ar c'hulturel...

## TALBENN SEWENADUREL ARAKOUR BREIZH

Ennañ Ar Falz, GERIB, PS, PSU, RTB, SGEN/CFDT, Skol an Emsav, SNRT/CGT HA SFRT/CGT FR3 Breizh ha Broioù al Liger, UDB...

Embannet d'ar 4-10-1979 gant Sekretouria an Talbenn ar gemenadenn-mañ ewid ar wask :

Gant digor ar skolioù 1979 o weler splannoc'h c'hoazh n'eo ket ar chart un diskoulm da gudenn ar c'helenn eus yezhoù hag eus sewenadur Breizh.

Bodet e Rostren d'an 29 a vis Gwengolo, o deus gwaer an aosa-durioù esel eus an Talbenn ar gont eus an doare ma vez lakaet da dalvoud Chart Sewenadurel Breizh.

War dachenn ar c'helenn, e welont ur wech ouzhpenn n'eo ket bet gwellaet da vad ar stad anezhañ er bloaz-mañ adarre ;

— netra ouzhpenn ewid pezh a sell drouz ar skolioù kenteg ha rag-kenteg ;

— netra ouzhpenn kennebeud e 6<sup>e</sup> klass hag e 5<sup>e</sup> klass ar skolioù, ma 'z eo rouez enne ar c'hentelioù ha kempennet fall gant ar Mere-rezh ;

— er 4<sup>e</sup> klass, ma raer diouzh an disklêriadurioù ofisiel, e oa bet roet d'ar skolidi an tu da choas ar brezhoneg evel « dibab 2<sup>e</sup> yezh » ; wardro 60 a gevrennoù a c'helle bezañ krouet diwar aotre ar Rektori, mes ped a vo bet krouet e gwirionez ? Nag ar skolidi nag o c'herent n'eo bet kaset ar c'helioù dezhañ en un doare reizh, hag ez eo an niver a 15 skoliad rekis ewid ma vo digoret ur gevrenn, ur skoliad da grouidigezh meur a gevrenn ;

— en 2<sup>e</sup> kelc'hiad-studi erfin, o deus kavet ar gelennerien hag ar skolidi an diaesterioù boas : diouder a gelennerien, taolennoù implij-amzer ar c'helenn brezhoneg savet war-lerc'h heni an danvezioù all, ar c'hentelioù brezhoneg lakaet da eurioù n'hell ket ar skolidi mont dezhañ.


Dirag Les-Varn Surentez ar Stad, en deus an Ao. Martin, Rektori kozh Akademiezh Roazon, touet war e feiz e oa bet sewenet ar Chart Sewenadurel en he fezh e-barzh an deskadurezh. Dre e desteni, hag heb komz eus bolontez fall ar Mere-rezh a weler hec'h efed re alies war an dachenn amañ, en deus ar

Rektor Martin degasset ar brouenn eus distervezh anad ar Chart-se, aotreet dre c'hrad-vad ar Stad ewid ober van, hag ewid lakaad ar Vretonnvd da gredñ ez eus bet gwaer un disterrañ tra ewid kennig un diskoulm d'o c'hudennoù sewenadurel.

Piw' gredo an Ao. Martin, piw' gredo pennadurezhioù an Akademiezh pa raont van da larede e c'heller kelenn ur yezh hag ur sewenadur anes stummañ ar gelennerien, anes krouañ ar c'hargoù-kelenn rekis ewid ar gelennadurezh-se ? Ar Vreizh, n'int ket genaouerien. Gouzoud a raont erwad e vez gwaer goap anezhañ, hag e talc'hint d'henn disklêriad dre berzh an aosa-durioù oc'h ober ewito.

Ewid an Talbenn, eo bet diviset gantañ kass keloù dre bewer c'hoar ar vro, ha kass ar stourm war-rog gant stummoù newez o tennañ d'ar memes pal : gwaskañ war ar Stad ewid henn lakaad, a-benn ar fin, da assantiñ d'ul lezenn votet gant ar Parlamant, ma vo roet ganti statut just, leun hag ofisiel da yezhoù ha da sewenadur Breizh.

AMAN EMGLEO BREIZ!



Armand Kéravel

Delc'her a ra Emgleo Breiz da embann e bennadoù beb sizhun. Peurliesañ, ha memes ingal tre, e vezont moulet war Ouest-France. War an Télégramme avad ne vezont ket gwelet : ewid doare n'eo ket « persona grata » eno Sekretour-Meur Emgleo Breiz... N'ouser ket re vad pegedid so e talc'h Armand Kéravel, Sekretour-Meur Emgleo Breiz, da sevel ha da lakaad moullañ e bennadoù : pa larimp ugent vloaz so e vimp, moarvad, tost awalc'h d'ar wirionez. Red eo saludiñ un dalc'husted hag ur bennegezh n'int ket eus ar stankañ e-touesk « paotred ar brezhoneg ». N'ouser ket hag-eñv ez eo a-drugarez da bennadoù Emgleo Breiz an heni eo deuet kudenn Vreizh da vezañ diouzh ar c'his (heb lakaad tamm dismegañs ebed er gomz « gis »). Rag ul lusk zo bremañ gant Breizh, pe gant ar brezhoneg d'an nebeutañ, e-mesk ar Vretoned, en desped d'ar berzh-diverzh a beb sort a gaver iwe. En desped d'an FLB, en desped da bennoù kleiz Paris, en desped da gliadenn spontus ar brezhoneg e-korf an ugent vloaz tremenet-mañ. Sur eo deus pennañ Emgleo Breiz roet dorn d'an emdroadur a weler e efed bremañ. Red eo ansav en deus Sekretour Emgleo Breiz kavet an tu d'en em gerner gant ar Vretoned. N'eo ket ar skiant-prenet a ra diouder dezañ. Pa vo larèt ema war an dachenn abaoe hanter-kant vloaz, e vimp, amañ c'hoazh, tost awalc'h d'ar wirionez...

Ne oar ket ar re yaouank, moarvad, pebezh prantad spontus eo bet ewid Breizh ar bresel diwezhañ, ha ken gwazh all, ar bloawezhiou o dont

diouzhtu warlerc'h. Ewid Breizh evel Breizh, ha n'eo ket hebbén evel ur rann eus ar Frañs. Ar Vretoned aet e-barzh ar Resistañs a oa Bretoned vad a-dra-sur, hag o dever o deus gwraet, ha skulhañ o gwad iwe lod anezo, ewid digontammañ ar vro-mañ eus gouenn euzhus an Nazied. Mes, peira bennag ma oant Bretoned vad oc'h ober kement-se, ez int bet kemeret, gant ar boblañs, kentoc'h evel Frañsien eged n'int bet gwraet evel Bretoned. Rag bez 'zo bet Bretoned all — daoust ma n'int ket bet gwall stank — hag a zo bet chomet klouar epad ar bresel ewid enebid d'ar Resistañs. Ur fasi eo bet, un torfed divent. Un torfed anezañ e hunan da gentañ, hag e-keñver an heuliadoù anezañ, emamp c'hoazh douzh o faeñ, kement heni ahanomp en em sant brogarour breizhad. Rag, e-ser kastizañ an dorfedourien, en deus gouezet ar gouarnamant gall teuler an dismegañs hag unan a oa da badoud pell — war gement den deden-t gant Breizh, war gement tra o tennañ da Vreizh. Ur mailh eo bet ar gouarnamant ewid lakaad ar Vretoned da vallozhiñ, int-i o hunan, o hanw a Vretoned, o fersonelezh, o yezh, o sewenadur. Ewid chom heb bezañ kemmesket gant ar re o doa Vretoned ar brassañ mall d'en em zisober diouzh kement hag o laka da vezañ disheñvel diouzh ar C'hallaoued. Ha mall bras warne da vezañ « Frañsien vad » : yezh, drapo, sentidigezh douzh Paris. Dre

ma ne oa ket tu da gelenn na da vru-dañ an diforc'h reizh a zleer ober etre « broadelezh » ha « keodedadelezh », peogwir he doa ar Stad C'hall vourc'his kemeret ewiti he hunan kement « broadelezh » a zo er Frañs, e oa ar stourm ewid Breizh un torfed diskr a-eneb an « unvaniezh vroadel ». Gant ar gaoz bet gwraet abaoe an Dispac'h Gall (pa na ve kén) a-eneb ar poblu gwirion a zo oc'h ober ar Frañs, e talveze — hag e talc'h da dalvezou e spered ul lodenn gær eus keodedis ar Frañs —, e talveze « broadel » kement ha « stadel ». Gouezet en deus ar gouarnamant gall etia ober e vad (?) eus ar reus degasset e-touesk ar Vretoned gant ul lodennig anezo a oa bet diheñchet. Embannet o deus an dileuridi eus Kembre bet deuet d'ober un enklask e Breizh (e 1947) e oa bet kastizet ar Vretoned « kablus » abalamour d'o dibabou politikel breizheg. Kablus e oa lod, al lodenn vrasañ ne oa ket. Rustoc'h eo bet ar bazhadouret d'ar Vretoned o eod « kenlabouret » evel Bretoned eged ar re roet d'ar « genlabourerien » all...

E-kehid ha ma oa ar gouarnamant gall o poañiañ da ziverkañ a-ziwar hor planedenn beteg an hanw a Vreizh, e pakas ar re a oa a-du ganti, pe evel broadelourien pe evel rannvroelourien, ur c'horfad aon. C'heller kompren. Pa vezer bet e « Camp Marguerite » Roazon, e Sant-Charles Kemper, e kamp an « indésirables » Sarzhaw, hag e meur a lec'h ken « goudeoret » all, ha memes pa vezer bet chomet heb bezañ kaset d'an « disheol », e c'heller santoud ar galon o vont bihan ennor, gant an awelaj foll dirollet neuse.

Pebezh taol-chañs ewid ar Jakobined ! Achiuñ ur wech ewid mad gant ar ouenn villiget-se a « emrenerien » ! Ha dao dezi ! « Broadelourien », « rannvroelourien », boud ar groug toud ! N'eus ket krouget den ebed, mes fusuilhet eo bet ar re o doa kemeret an armoù a-eneb ar Resistañs. Hag ez eo bet digoret marewez ar spont, a oa da badoud ugent vloaz, ar dost.

Armand Kéravel e hunan, hag eñv eus harperien gentañ Yann Sobier er Falz, a voe kaset da « Marguerite ». Buan e voe didoullbac'het, a-drugarez da Resistanted zo (hag e-mesk ar pennoù bras) henn anavezet.

Ase e oamp ganti etia e 1945. Ne oa ket digoumoul oabl Breizh, a c'heller kredid... Penaos en em gerner ganti en-dro ewid roñ e chañs d'ar brezhoneg e-diabarzh ur Stad ken jakobined na ken kintus ha biskoazh ?

Un den eus an tu kleiz eo bet a-viskoazh hag ez eo ar mestri-skol dindan Stad Armand Kéravel. En amzer-se e kemeras e gartenn ewid mont e-barzh ar PCF. A-drugarez dezañ moarvad eo bet savet an danvez-lesenn ewid ar c'hellen brezhoneg o tougen hanw ar c'hannad PCF Hervé... Ne oa ket fur, er mareoù-se ma c'hwetze awel yud ar waskerezh a-eneb ar Vretoned (ar re bet diheñchet hag ar re na oant ket bet gwraet), ne oa ket fur diskouez bezañ re domm douz al lodenn-se eus ar Vretoned ebed aet war o chupennou pe o brozhiou ur strinkadenn bennag eus an « dizellid broadel ». Deuet e oa ar c'hoazh da gomz eus « petite patrie » ha « grande patrie ». Ar re a ra e an diforc'h-se a oa, al lodenn vrasañ anezo, broadelourien wirion, med e kuzh, evel Josef a Arimatea an Awiel, a oa a-du gant Hon Salver, med e kuzh, dre aon rag ar Judewien ». Goulenomp ouzhip-ni hon unan : petra hon dije-ni gwraet ma vefemp bet war al leurenn e 1945 ? Lod a vefe en em reuatac en e emalc'h a vroadelourien heskinet. Ha kement-mañ a c'hoarvezas e gwirionez. Penaos chom heb o c'hompren ? Lod all o dije gwraet ar pezh a reas lod eus brogarourien an amzer-se : o santoud e oa Breizh en arvar — hag e oa — kener un hent all, plegañ banniel Breizh hag penn sankañ don e fofis ar fic'ed... Heb ober ar gont eus ar re a 'n em daolas, divezh, douzh treid ar Frañs vadelezus, hag a zinac'has krenn o fersonelezh a Vretoned...

Un hent all a gemeras lod etia : plegañ, pe ober van da bleagañ, ober diouzh ar pezh a c'heller ebed, heb ober hanw re, na tamm ebed, eus banniel Breizh... Un emalc'h hag a zo bet kavet pilpouss ha kouard... Piw 'laro ne vez James tamm pilpousserezh ebed e-barzh ar politiek ? Ar pilpousserezh, arm ar re van ? Bras

meurbed, divent, e teuas da vezañ ar fosell a oa etre « broadelourien » me-mestra, hag a ra e van da vezañ « rannvroelourien ».

Sur ne oa ket aset goud pehini 'oa an hent mad... Bezet pe vezet, e talc'h Armand Kéravel da vont gant e heni : feal d'ar Stad ha d'e bw petite patrie ». Goud a ouie ervad pessor-tro-spered a oa heni ar Vretoned : arallekaet, gallekaet ha gallekaet muioc'h-mui bemdez, nag un elfenn emskiant vroadel enne. Penaos komz dezo eus « emrenerzh » ? Diouzhtu, kerkeret, e vefe bet degasset da soñj d'ar Vretoned eus « torfedourien » ar bresel, ar re wirion mesket gant ar re na oant ket bet.

Fur e oa, moarvad, plegañ d'ar darvoudoù, daoust ma chomas kalz heb plegañ dezo. Red eo eus koulsgouenn an alusen, bet ul lodennig bennag eus e c'hoant, war dachenn ar c'hellen brezhoneg hag ar radio-tele d'an nebeutañ. Da lared eo, kement a vez gwraet, a-berzh Stad, hiziv an deiz, ewid ar brezhoneg. Triast eo, mezhus eo, ez eo bet redi mont da glasker bara a-benn kaoud, n'eo ket ar pezh 'zo dleet, mes un tamm digoll bennag warlerc'h ar gaoz bras bet gwraet ouz ar Vretoned war dachenn o yezh. Mes, daoust hag un hent all a oa ? Sur eo iwe o deus ar re a zo bet chomet kehiald pennege ha divrall en o emzalc'h a vroadelourien (hag arabad farsal amañ en ur lared e oant oll eus an tu dehoù), sikouret kaer ewid tennañ karr Breizh er-maes eus ar vouilhenn... N'eo ket divroc'het ewid-se paotred (ha merc'hed) an diw gostezenn...

Nemed e voe krouet an UDB e 1964. Tridal a reas Kéravel gant ar joa. Heb mont e-barzh avad (er PS ema bremañ). Troet he doa ar rod a-benn ar fin... Tuta 'reas an UDB e-diabarzh an diw gostezenn. Hag e talc'h d'henn ober. Bez e c'hell an UDB, hiziv an deiz, komz war wel d'an oll, re an tu kleiz gall hag all, eus emrenerzh sokialour ha demokratel ewid Breizh. A-wechoù e oar lod eus ar jakobined a ouenn vad a

gaver stank mat c'hoazh e-diabarzh ar strolladoù politikel eus an tu kleiz gall, a-wechoù e ouezont distagañ flennadennoù didreuz douzh re an UDB. Koulskoude, ewite iwe he deus troet ar rod. E Kreis Breizh, e vez gwraet eus re an UDB « les Breizh ». Ugent vloaz so e vefent bet « les Breizh atao ». Ar chañchamant n'eo ket distar.

Bez e c'heller lared ez eo dibasset Kéravel gant e « ziskibled ». Forzh pegen mouzhet e c'hell bezañ ouen, e oar ar re-mañ an dlead o deus en e geñver. Hag e-keñver meur a heni all eus o diagentid. Klewet eo bet mouezh Emgleo Breizh, ewiti da vezañ kaiz re zister bremañ.

Gant an amzer o vont hebiou, gant ar reus c'hoarvezet epad ar bresel ha warlerc'h, gant ar sach-blew hag ar barradoù fulor a vez, ur wech ar mare, e-diabarzh metoù bihan an emsav brezhoneg, en deus Kéravel kollet kred e-barzh ur strollad politikel breizheg eus an tu kleiz ewid Breizh. Setu perag ema o c'hoant e rannvroelour e-barzh ar PS, ur PS kalz muioc'h gall eged na soñjer. O c'hoant e rannvroelour, eñv broadelour eus an tu kleiz e don e galon. Daoust ha Chevenement, Rocard pe Mitterrand zo ne c'hell bras gant Breizh n'eo ket o bro ? Ahanta, ken-vroadesed ha kenvrois ker, n'int ket. Setu perag ne vez Kéravel en e vlead nemed e-diabarzh Emgleo Breizh, goude ret e-barzh neptuegezh di-zañjer ar c'hultur (bez' e c'hell ober bec' abalamour ma ne vez ket sewenet ar Chart kulturel gant Paris, heb denoñsiñ homañ tamm ebed). Petra bennag m'eo eñv, Kéravel, an heni nemetañ a zo deuet a-benn d'ober « adurien » ar brezhoneg eus ul lodenn gær eus e genvrois. Mes n'eo ket gant tammou bruzhuz, ha pa vefent brezhoneg, e vo roet o gwalc'h d'ar Vretoned, tud digor bras o c'halon. Saludiñ etia labour efedus Emgleo Breizh zo d'ober, mes n'eo ket Emgleo Breiz an heni a gomz hiziv an deiz eus emrenerzh demokratel ewid Breizh. Ha setu perag e kaver spenn iwe e-barzh ar boket ros ruz-mañ.

Papereñ ewid goulenñ mont e-barzh UDB

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

Goulenñ a ran moned e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (br)ar) .....

Sin : .....

Da gass an dro (troc'het pe adskrivet) 19 .....

UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

AR FALZ

kelaouenn drimiseg an Em-sav disezet gant Yann Sobier, bodet emañ skolarion ha kelennerien Vreizh a-du gant ur skoll vreizheg ha laik gwirion

Lennit Ar Falz ! Komanant d'Ar Falz !

(30 L ewid 6 niv.)

AR FALZ, Str. Kan Ar-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRouLES

KRP 430 20 H ROAZON

AL LIAMM

ar gelaouenn nemeti o roñ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennoù a beb sort ha keleier

80 pajenn e peb nivereñ - Rener - Roman Huon

Komanant : 50 L - Studierien : 35 L

Telzorer-meurour : P Le Bihan - 16, rue des Fours à-Chaux

ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

# ADLODENNAÑ PE DILODENNAÑ ase ema an dalc'h !

5



Tamallet eo bet iwe an adlodennañ abalamour ma ra wardro al labour-douar hebkén, heb delc'her kont, tamm ebed, deus an dud all o chom er parresioù adlodennet. Kontañ 'ra kalz c'hoazh al labour-douar el lodenn vrasañ eus kumunioù hon bro. Bez eus enno kaulskoude tud o vevañ diwar labourioù all iwe. Red eo esperoud zoken e kresko an niver anezho, ma fell deomp, a-benn ar fin, gweled un termen da zivroañ ar re yaouank. Setu perag eo mad em c'houlenn daoust ha moian zo d'ober un dra bennag, ewid an dud all iwe, gant an adlodennañ. Pa vez bet aaset ur POS araog, da lavaret eo, dre vras, ur ragress ewid gouzoud pessori implij e vo gwraet emzerc'h da-zont eus douaroù ar gomun, e vez oes d'an adlodennerien lezel a-gostez an tachennoù n'int ket tachennoù labour-douar. Pa ne vez POS ebed, hag alies ne vez ket, e c'hell an adlodennerien, herwez lesenn mis Gouere 1975, lezel a-gostez beteg 2% eus oll zouaroù ar barres ; miret e vint, ma 'z eo c'hoant ar gumun, ewid sevel tiez e-kichen ar bourk pe e lec'h-all, heb trafikerezh ebed war bris an douar, pe ewid reiñ pliss d'ar artisanted ha d'ar stalioù-labour. Gant ma ne vo ket staliet ar re-mañ ewid sunañ ar micherourien ha skrapañ gwennien ar gumun, araog serriñ ar voutik ha mont diwar wel heb goud dare da zen. Bez e c'heller c'hoazh, war ar pezh douar-se, kempenn un dachenn foot-ball, pe ul lenn hag a servijo da dud ar vro, ha d'o loened ma vez red, araog servijoud d'an douristed. An 2%-se a vez poeet d'ur pris dereod d'o ferc'henned, ma vez c'hoant ar re-mañ lezel o douaroù hag o gwerzhañ. E-mod-all e vezont ingalet, hag iwe an douar roet ewito, etre oll berc'henned an dachenn adlodennet.

Kement ha komz eus arc'hant, lavaromp ur ger diwarbenn un dra all hag a laka an teodoù da vont en-dro e-leizh : ar goprou a ya e-barzh godelloù poeet an DDA diwar an adlodennañ. Klasket 'm eus gouzoud hir-roc'h eged ar pezh a vez kontet e-touesk an dud, prim un tammig, war ar poent-se. Setu amañ ar pezh a'm eus klewet digant tud a zo krog e-barzh ar jeu. Da gentañ, poeet an DDA ne vezont ket ar re nemeto, e-touesk kargidi ar Stad, o c'hounid arc'hant e-gis-se : heñvel eo an ofer gant poeet ar Pontoù hag an Hentoù (hanwet DDE bremañ), tud Ministrerezh an Arc'hant (an Dehzererien Veur, da skwer), hag iwe poeet an Tailhoù. Adreñt int bet d'ober kement-se diwar ul lesenn votet e 1955 gant ar Gannaded. Da eil, ouzhpenn al labour all, e teu an heni a zegass ar goprou-se ; ha ma vefe gwraet gant ijinourien brewez, tiijinourien, mentanourien, hag all, e koustfe dig pe dir gwech muic'h d'ar c'hounid, rag an dregantad kemeret gant ar gargidi a ya war zigreskiñ, eus 4% da 1% dre ma kresk koust al labourioù. Da drede, arabad lavaret ez eo abalamour d'ar goprou-se an heni e vez diskaret ar c'hleuzioù ha pilet ar gwez ; rag, ma ne vez ket implijet arc'hant Ministrerezh al Labour-Douar ewid ober al labourioù a ya da heul an adlodennañ, e vint implijet da ober traoù all, evel kass doue dre gorrzennoù, pe an tredan beteg ar c'hériadennoù, gant ar memes DDA, hag ar goprou ne vint ket iselloet tamm ebed ewid se. Mad e vefe da lod deus enbourien an adlodennañ soñjal un tammig em dra-se araog lavaret re a ziofachoù war ar poent ressis-se. Da beware, ne vez ket roet an arc'hant, dioutu ha war-eeun, d'ar gargidi, evel ma vez roet d'ar vedissigant o c'hlianted ; roet e vez an arc'hant d'an

Teñzorer Meur, ha lakaet en ur c'hef boutin ewid ar C'hwec'hogn en e bezh ; ingalet e vez e lod da beb heni goude, herwez e renk hag e labour, goude ma vez bet dilamet ul lodenn ewid ar re a labour er Ministrad hag er c'hreissennoù-enklask teknikel. Disklêriet e vez da baotred an tailhoù, eveljust, an arc'hant gounezet e-gis-se. Da bembed, kalz a gargidi o hunan e kav dezo ez eo an doare-ober-se ur fesson kamm awalc'h : bez' en dez ar gouarnamant e-gis-se un digarez ewid poeñ anezho nebeutoc'h : hag ewid lakaod ar parresioù da baeñ ul lodenn deus o gop. Rag, red eo lavaret ez eo bet stummet, alies, ar gargidi-se e-barzh skolioù hag a ro tro dezo, mar karant, da guitoad ar Mererezh Boutin, ha mont da labourad ewid an Ijinererezh hag ar c'henwerzh prewez, ha da vezañ gopret un tamm mat muic'h ewid dindan ar gouarnamant. Krediñ a ran, a-benn ar fin, ez eus kalz anezho hag a gavje gwelloc'h gounid un tamm nebeutoc'h en oll d'an oll, ha bezañ poeet gant ar gouarnamant hebkén, heb tamm gop ebed diwar al labourioù gwraet ewid ar c'hounid. Rag touellet e vezont int-i o hunan gant an doare-se, dre ma vez diazset traoù zo dezo, evel a retrred, war ul lodenn bet poeet gant ar gouarnamant hebkén. Ha ne vez ket ur blijadur ewito kennebeud bezant tamallet ataw, ha kaoud war o chouj dizif an dud a-wechoù, abalamour d'an arc'hant ressewet e-mod-se.

Diwarbenn distruj an tra-dro gant an adlodennañ, ez eus bet savet ur cholari bras, sur n'eo ket unan bihan c'hoazh ! N'eo ket gant ar beisañted eo bet gwraet an tamalloù war ar poent-mañ, ar c'hontrol eo zoken. Gant tud o chom er c'hériou ne lavaran ket, hag a vez o tont war ar maes da glask glasadur ha sioulder, pell diouzh

trous ar gweturioù ha diouzh liw divalav ar simant. Dont a ra soñj dezo deus kajoù hag lanneier o bugalei hag o yaouankis. Bez' e kaver c'hoazh studieren, kelennerien, ha klaskerien war gement tachenn o tenañ d'an natur : douaroniezh, bewoniezh, lousaworiezh, loenoniezh, hag ekolojiez dreistoll. Ne c'housañ ket an dud vad-se, anes bezañ enkreset ha trubuilhet bras, gweled an distruj gwraet d'an natur, hag ez int prederiet gant da-zont ar bed bew. Da dud all iwe ez eus deuet ur c'hoant bras da vezañ hanwet e ekolojisted, petra bennag ma ne ouezont ket ataw re vad petra eo an an dra-se. Hag ez eus bet lavaret, mesk-ha-mesk, ur bern diatohaù, ha traoù fur meurbed iwe. Daoust ha re a zour a weler o redeg ? Dre fañs an adlodennañ eo, sur ! Dont a ra sec'hour bras warlerc'h ? Memes respont. Klav e eo ar saout dre amañ ? Diwanañ fall a ra an ed en tu-hont ? An adlodennañ zo kos amañ c'hoazh, eveljust. Groump ur sell a-dastoc'h doazh an tailhoù, ma fell deoc'h, ha klaskomp gweled ar pezh zo gwir ose hag ar pezh n'eo ket. Ewid kement-se, eh em harmp war studiadennoù bet gwraet gant INRA Roazon (Ensavador ewid an Enklask war drao an douar) e tri c'houblad kumunioù e-barzh ar Mar-bihan : e peb koulbad, adlodennet eo bet ur barres, eben n'eo ket bet gwraet ; heñvel tre e-mod-all o diw, ha stok-hastok.

Diwarbenn an emzerc'h gant. Er c'hontrol eus ar pezh a vez kredet alies, e vez brassoc'h kemmañ an derez-gwies etre an deiz hag an nos, en un dachenn douar klosek gant kleuzioù ; pas kalz, gwir eo, wardro un derez hebkén. Abalamour da se e c'hell ar rew en em gavoud buannoc'h e-kreis ur park klosek mad, eged en ur park digor d'an awel. Er c'hontrol, buannoc'h e teu an eost, evel ma vo gwelet pelloc'h, en ur park gouzoret. An awel, her gouzoud a-raer, a vez troc'het gant ar girzhier. Mes e-leizh e fepant efeduset ur c'harzh deus hec'h uhelder, he zewder ha deus ar gwez a vez warni. Gwelloc'h e vez ur c'harzh, pa les un disterrañ banne awel d'en em silañ dresi, eged pa vez didoull a-grenn evel ur vur. Mad e vez dezi kaoud un tamm raden, ha gwez bihan e-harz ar gwez uhel, ha gwelloc'h e vez eveljust pa vez bet savet a-eneb d'an awelioù a zo ar fallañ ewid al labour-douar. War-hed un deg gwech bennag eus uhelder ur c'harzh e vez gwazret mad ur park ganti diouzh an awel.

Ha bez' ez eo an adlodennañ ar pen-nabeg d'ar sec'hour divalav a gras ar parkiere en hañv, ha d'an douar bras a vez ar c'hériou er gouañv ? Un efed vad o deus, sur, ar c'hleuzioù war an douar, ha dre se war an douar, dreistoll er parkiere a zo war o c'han. Mont a ra an douar aeo-soc'h en douar, e-lec'h redeg dioutu d'ar richerioù. An douar e hunan ne vez ket kaset kement warnu an traoù gant ar c'haouadù glaw. Peb heni a oar an dra-se, mes n'eo ket pell zo eo bet studiet ha musuliet p'haoc'h gant poeet an INRA, deus Skol-Uhel al Labour-Douar e Roazon.

Kefveriet eo bet ganto daou richer bihan, er Mar-bihan ataw, unan kelc'hiet gant parkiere ha prajoù bet adlodennet, hag egile gant douaroù n'int ket bet gwraet. Diskouezet mad o deus penaos, ewid ar memes gorread a zour, e red an douar fonussoc'h ha buannoc'h, goude ar glaw, er richer kentañ, wardro 50% muic'h, hag e sav uhelloc'h iwe live ar richer kentañ pa vez an douar en e washañ. Hag awalc'h eo an dra-se, neuse, ewid lakaod war gant an adlodennañ kement hag a zo bet lavaret diwarbenn ar sec'hour hag an douar-beuz ? Arabad mont re vuan memestra. N'eo ket hebkén abalamour ma 'z eus chomet nebeutoc'h a wez en-dro d'ar parkiere eo ez eus bet ur sec'hour vras o c'hoari e reus en hañv 1976. Daoust ha fonussoc'h e vefe bet ar richerioù e-mod-all ? Un tamm martese, med diaes eo gouzoud pegement. Pelloc'h ema abeg kentañ ar sec'hour da vezañ klasket. Diouzh an tu all, daoust ha ne vefe ket bet beuzet ar c'hériou, epad ar gouañv, ma ne vefe ket bet adlodennet ? Penaos touañ an dra-se, ewid beuzadeg Roazon e 1974 da skwer, pa ouezer e oa bet savet an douar e k'ar uhelloc'h c'hoazh er bloowez 1966, daoust ma ne oa bet adlodennet nemed ur barres hebkén d'ar poent-se, e-touesk an oll re a zo en-dro

d'ar richer, da lavaret eo 2% eus an oll c'horread a zegass e zour d'ar Wlen uhelloc'h ewid Roazon. N'eo ket ken sklaer ar jouc'her ewid an douar bras deuet war g'erioù Montroules ha Kemper. Med, forzh penaos, arabad ankounoc'haod an traoù all kennebeud ; diskaret ez eus bet un nebeud mat o c'hirzhier, ha taolet ez eus bet kalz kleuzioù d'an traoù, gant ar beisañted, en diaoes eus an adlodennañ. Implijet e vez iwe gant ar re-mañ ur mod nevez da labourad an douar ha da brodiñ (ewid ar mais da skwer), ha na zalc'h ket an douar war ar parkiere kankoulz ha doareoù labour a zud kozh. Leuniet ez eus bet, e bord ar richerioù, meur a doull bouilhena a en em lede an douar ennañ araog, ewid ober plass da sevel tiez ha da stalioù labouradegoù e-kichen ar c'hériou. Koultronet ez eus bet kalz plassennoù hag e-leizh a heñchoù. Un tammig e peb lec'h ez eus bet lakaet korzennoù da gass an douar glaw war-eeun d'ar richerioù. Neuse ez eo bet kresket an douar a vez war ruilh e-barzh ar gwazhioù hag ar richerioù, tra ma 'z eo bet strishaet an dachenn ma vese o c'hoari warnañ ket.

Sur n'eo ket didamal an adlodennañ, med n'ema ket e hunan, an tost, da vezañ tamallet.



War ar bladenn-levr-mañ e cheller kavoud c'hwegz kanaouenn pe rimadell, anavezet mad dreist-oll e Bro-Gerneu, ul lodenn vad anezhe entallet ewid ar wech kentañ : savet eo bet express-kor ewid ar vugale a zo o teskiñ un tamm brezhoneg er skol, ha sur-awalc'h o do ar re-mañ plijadur o kanañ anezhe, er ger, gant a zud pe gant o zud-kozh. Tennañ a rapont d'an amzer, d'ar boued, d'an ti, d'al loened, d'an deizioù, d'al livioù ; tu'vo, memes, da lakaod ar vugale da zañtal pe da c'hoari divane. E gwerzh emañ e stalioù diskou pe levrioù, hag e ti SKOL VREIZH, 1 plassen ar Marcholec'h e MONTRouLES.



# LIZHEROU

Intereset bras on bet gant ar pennad (sinet Fañch Morvanou): « Breudeur, ni 'ghev ho klemmou eus an tu all d'ar mor », bet moulet war b/Pobl Vreizh niv. 115 (Gwengolo 1979). Soñj mad 'm eus bezañ bet kletet ha kanet ar c'hantik-se gwechall (un den kozh on bremañ). En amzer-se ne oa ket hanw eus politik e-touesk an dud; laosket e vese an dra d'ar-jeruse-gant an dud desket ha pinwidig. Ni, peisanter paour ahonomp, di-zesk e oa trawalc'h deomp drailhañ brezhoneg, troc'hañ buzhug ha roññ peuc'h. Ar velen a lare dimp petra 'oa mad, petra 'oa fall. Ha ni, paourkaezh tud dister ha divad, petra hon dije gwraet nemed selauo o mouezh, plegañ, sentañ...

lakaomp, ar Gmered Ruz hag o Pol Pot ? Lakaad ar binvioù-produñ boutin en ur vro ? Ya, a-du. Mes perag e c'hwit ar sossialism memestra ? Ur spered « totaliter » a vefe gantañ dre red ? Pw, e-touesk re an tu kleiz (UDB hag all) en deus denoñst doareoù vil ha doñjuz Pol Pot ? Aesoc'h eo roññ bazhadoù d'an Ayatollah Khomeiny, peogwir e weler pegen fanatik eo, diwar ur relijion lakaet gantañ da vatezh ur politikerezh eus an tu dehoù pe-lañ. Mes daoust hag-erñ n'eo ket Pol Pot ur fanatik iwe, hag en deus lakaet ur « sossialism », ur sahet-sossialism da vefañ gwashoc'h eged ur relijion, o kass d'ar marw milionnoù a dud... Emaon o c'hortos kleted digant pennoù bras ur gostezenn gleiz bennag (eus Frañs pe eus Breizh) ez eo Pol Pot ur Stalin all, un Hitler all. Perag ne greder ket henn lare, mard eo gwir ? Ha piw' laro n'eo ket gwir ?

Tud zo, rekuperet gante an hanw a « sossialist », n'int nemed sunerien gwad. Netra da welet gant ar sossialism a venomp ewid Breizh. NETRA. Pobl Vreizh

Diskaret mat eo bet rouantelezh ar velen... N'emaint ket mestr ken war spered an dud. Deskadurezh zo bremañ war ar maes hag all, petra bennag m'eo bet tapet homañ diwar gouz ar brezhoneg. Kroget eo ar Vretoned da gaout istim memes ewid tud na soñjont ket evel al lodenn vrasañ eus ar gompagnonezh. Pa oan me yaouank, e save jedi, trous ha bresel etre ar « re wenn » hag ar « re ruz ». E-barzh ma c'hornad-me o gwenn an dud kentoc'h. Kleted a raemp komz eus parresioù «ruz», di-zoue, er Menz du-hont, pell, lec'h ma na yae ket an dud d'an ofrenn d'ar sul, lec'h ma vese labourer d'ar sul, lec'h ma ne vese ket kalz a dud (pas ar baotred d'an nebeutañ) o vont da gask o Faskoù, lec'h ma vese pec'het ha sakret en ur gass ar c'hesez... Spontet e veseomp... Bremañ, ar ru war an oad, e komprenn gwelloc'h n'heller ket lakaad an dud da vefañ a-du gant ar relijion, pe gant n'eus forzh pesort tra all, ma ne vezont ket inti-o hunan gant ar soñj-se. Kompren a ran gwelloc'h bremañ ne oa ket ar « re ruz » tud didheñket ewid-se, mes e oant tud paour, hag o doa kavet e-barzh ar gostezenn ruz ur reson bennag da esperoud gwelod o stad o vont war wellad. Heb gortos an digoll er bed all. Rag ma n'eus bed all ebred (lod a gred ez eus unan, lod all ne gredont ket), e c'hello ar paour bezañ touset gant ar pinwidig betek fin ar bed, betek e fin dezañ da vitannañ, ha c'hoazh e ranko klabod se mad... Un dra vad eo bet etia an diskar en em gavet e-barzh rouantelezh ar velen, rag piw, e-touesk ar re a hanw « tud », a c'hell laredez em ar wirionez gantañ en he fezh ? Fin zo bet etia da c'halloud dilharz an aotrouen-se, pe, d'an nebeutañ, ez eo bet brallet kaer an ti kozh a vez gwraet an liis anezañ.

Fiziañs 'm eus e kavin ur respont un deiz bennag da'm goulen. A-du gant ar sossialism. Mes pas hennezh. Ganeoc'h ewid Breizh.

J. L'Hours, Kemper

Trugarez vras a laromp d'hon lenner a Kemper ewid e lizher ken plijus ha ken kenteluis. E-barzh « chart » an UDB, e lenner ez eo ar Strollad a-eneb da gemer gwaskerezh e zo, juhererezh, diskriminajesonou politikel... Ema an UDB, war an diazezoù-se, o klask sevel ur Vreizh emren ha sokialour. N'he devo netra da welet gant Kamputchezh Pol Pot na gant Iran C'homeiny, na gant Chili Pinochet na gant Arc'hantina Videla. Sur eo ez eo bet saotret hag ifamet ar ger « sossialism » gant ar re o deus kemeret o harp warnañ spont hag ar marw. Ur mennos politikel n'hell ket bouid mad ma vez red, ewid henn sewenñ, fasilhañ milieroù a dud.

Emaon o paoues lenn ar pennad « Breudeur » (PV niv. 115) diwarbenn an dud lazhet pe gwall-voustrer gant ar pezh a ra aoser ar pennad « totalitärelezh » anezañ. Ne fell ket dezañ e vefe gwraet « sossialism » eus an doare-se da ren ar broioù.

Pell zo emañ o klask kompren perag ez eo deuet ar sossialist « gwirion » da vefañ gwaskerien ha munterien e kement bro m'o deus gellet kregiñ er beli ewid nemedek. Bremañ ez eus wardro milion a dud dindan galloud ar sossialist. Ha diouzhi ma 'm eus bet gwelod va hunan (nebeudig a dra sur awal'h), diouzhi ma klewan, diouzhi ma lennan, em ar memes urzh o ren dre an oll kizik ebed — pe nebeud — ewid ar mennoù dishevel diouzhi re (pe : heni) ar Stad ; disfiz etre an dud, gant an dever da ziskuliañ ar re a soñj a-dreus ; berzh dister al labour unnoù ha distroec'h c'hoazh heni al labour-dour. Ma welan mad, en deus ar sossialism c'hwitet war gement pal en doa, nemed daou : roññ boued ha gwarez d'ar re vitan (n'eo ket nebeud !), ha lakaad muioc'h a egalite etre an dud e-keñver an arc'hant hag an danvez. Med, nag a boan, a zaeloù hag a vad ewid tizhould ha diwall ar stad-se ! Pelec'h em arin un doare-bezañ hag an doare-ober a ren zo ken ledet dre ar bed ha dre an amzer, ma'z eo deuet da vefañ ul lezenn-skiant ken divral ha lezenn an ollidennerezh ? Ken divral ma c'heller diskouez e armo, heb fasi, penaos e troio an traoù e Zabalwe hag e meur a vro all ?

Ar reson gantañ a c'heller kennig eo ez eo an emsav sossialist disaezet war ur gelennadurezh-spered diwarbenn penaos ez

eo bet hag e vez krouet hag ingalet ar madoù danvezel. Ne 'm eus ket lennet Das Kapital, mes war a leverer, en deus Karl Marx studiet an destenn en un doare ken spis ha ken ollig ma ne les na toñj na frañh ebed ewid achapoud diouzhi e zisochoù. Diskouez a ra ar pezh a zo da ober ewid chafañ penn d'ar vazh : un « Ide », ur Mennos Meur, ur Mennad Meur n'eus nemeto. Setu, hervezon, hadenn an Totalitärelezh ; ma n'eus nemed ur Mennos hebñh gant ur Mennad hebñh, ne c'hell bezañ nemed ur parti hebñh da « engorañ » ar Mennos-Mennad.

Un tu all d'ar gelennadurezh sossialist eo an tu ollvannez anez. N'eus Doue ebed, eveljust ; n'eus « ene » ebed, e ster relijiel ar ger. En ur skubañ kuit Doue hag an ene hag ar bed-all, e le iwe ar gelennadurezh sossialist skubañ kuit diouzhi an den ar youloù, ar c'hoantioù, an emboulzadennoù a zo diwanet enañ, ha kresket enañ betek bezañ trec'h a-wechoù da nerzh ar c'horf. Ewid berzh ar Mennos Meur, ez eo red diskoultrañ an den diouzhi kement tech-den a chom da strobañ an heni. Ha skubañ a-ziv ar hent an dud a vije ur skoilh ewid kerzaden-red ar Menos-Meur.

Setu penaos (goude ped all ?) e kompren ar gwad hag an daelou a flistr dindan poues ar sossialism. Med... un mister all zo : perag 'ta ez a ur sossialism d'ar c'hae war an dachena o zo heni — hag a lavar n'eus nemetañ — krouidigezh an danvez ?

Da gentañ, abalamour, just awal'h, ma'z eo disaezet ar sossialism war studi an danvez, ha n'eo ket studi an den. Ewid ar sossialism, diskouez klok lezennou krouidigezh hag ingalerezh an danvez, setu ar mod nemetañ da sevel ur gevredigezh d'ar Mennos, ma vez displeget mad dezañ (Plato hag ar wirionez...), peogwir e welo emeo ar labourer ewid e vad dezañ e-hunan ha mad ar rummadoù da-zoni. Med an den, ewid doare, ma'z eo stag ouz an danvez, n'eo ket stag er mod ma fell d'ar sossialism. C'hoant en deus bezañ mestr war e labour, c'hoant en deus delc'her, mod pe vod, frezhez e labour ewitañ e hunan da gentañ ha bezañ lib da ober gantañ ar pezh a soñj mad : kreskiñ ar bern, bezañ dieub diouzhi beb sort ezommoù ha mistri, eskerm ewid madoù all, ingalañ d'e gensored... Med : labourer al labour, pe al labouradeg, pe ar gevredigezh, pe savadur ar sossialism zo heboud d'e c'hoant. Setu penaos e tisplegan berzh dister an ekonomiezh er broioù sossialist.

Ur reson all zo. Ar sossialism zo da gentañ ur gelennadurezh spered (intelektual). Un tu poues d'an emsav eo. An Ide eo lusker an traoù. Pa 'z a an traoù a-dreus, petra zo d'ober ? Adstudiañ an Ide da weled ha komprenet ha goet ha disaezet mad eo bet. A-benn ar fin ez eo « speredoulec'h » ar sossialism, eged ar relijion gristen pe ar kapitalouriezh. Gant an amzer hag an nerzh implijet ewid diwall ha displegan ar Mennos, gant an niver a dud a zo o c'harg servijañ ar Mennos, n'eo ket souezh e chomfe al labour e hunan warlerc'h.

« Sossialism an dra-se ? » a c'houlenn aoser ar pennad. Me a lavar, gant Jorj Marchais : « Ya ». E Bro-Russia, e Bro-

Sina, e Kamputchea (perag chom heb komz eus Bro-Vietnam ?), ez eo ar sossialism ur Mennos kaset da benn herwez e nerzh-diabarzh, en desped (eneb !) d'an den ha d'an danvez. Pol Pot zo aet betek ar penn peñhañ toud, ar re all n'o deus ket bet ezompe, pe n'o deus ket kredet mont ken pell.

Me a lavar an dra-se e gerioù fraezh. Aon 'm eus avad e vefe sossialist Bro-C'hall ha Bro-Vreizh a-du gant war ar poent-se. Milieroù ha milieroù a dud eus an tu kleiz zo bet en em savet da vanifestiñ ebed torfedoù all. Med, ma'z eus bet kavet tud, war an diwezd, da liwañ paper, n'eus bet savet gant heni ebed eus an tu kleiz manifestadeg ebed da saveteñ merzherien Kamputchea. Neo ket abalamour ne raont ket foudre-kæer gant poan an dud, med, da'm soñj, abalamour e oa talvoudusoc'h ewid trec'h ar Mennos : « On ne fait pas d'omelette sans casser des œufs », a skrive an Nouvel Obs !

Ewid distreiñ d'ar pennad « Breudeur », ne gavan ket blas ar sossialism gantañ tamm ebed. Ur vurutelladen yezhonel a stagte anezañ douzh ar skridelezh kristen : « paourkaezh tud... hiraec'h... Breuder... klemmoù... ankenius ». Kalz tud evel aoser ar pennad a em lavar sossialist a zefe klask kemered un hanv all.

Me 'm eus ket fiziañs er sossialism nag ewid Breizh nag ewid bro all ebed. Un dra re zañjuz eo ewid c'hant gantañ...

J. Abasq, 44800 St Herblain

Trugarez vras a laromp d'hon lenner ha komanter eus Bro-Naoned ewid e lizher ken hir ha ken interesant, hag interesantoc'h-a-se, dre ma weler erwad n'ema ket ar skrivagner anezañ a-du ganomp. Rag, betek goud, kea, ez eus ahanoemp demokret. Da larede eo tud hag a assant e c'heller soñjal, ober ha chom heb ober e doareoù dishevel diouzhi hon re, gant ma ne vo ket hanw en doareoù-se (an eil re hag ar re all) eus gwaskerezh e neb Jesson.



E Praha e tiwanas e 1968 blianiou, bresk siwazh, « Newezamter Praha ». E oad o klask sevel ur « sossialism dezañ ur bisaj denel ». Ma n'eus c'hwitet ar sossialism-se n'eo ket abalamour ma oa displegan enañ, mes dre m'eo bet mouget, bresket, flastret. En desped d'ar c'hwiadennoù niverus en em gavet e meur a vro gant an taolioù-essa gwraet da sevel un doare-produñ hag un doare-bevañ nann disaezet war c'halloud an arc'hant na war flastrezezh ha touezezh an den gant an den, ez eus c'hoazh forzh tud keuzet gant daou dra : kridet ar kapitalouriezh hag heni an imperialism. Ahendall, gant kirm-arsañh — hag e oasomp eus pelec'h int bet deuet — eo bet flastret blianiou Praha...

N'hell ket hon lenner gouzoud erwad pesort blas zo gant ar sossialism, m'arvad, nemed hag un talva bennag en defe bet anezañ hag a vefe chomet gantañ war c'hoant ? Ma 'z eo ar « sossialism » un dra euzhus ewid hon lenner betek henn lakaad da zisionkañ, e c'heller kompren n'eus tamm mall ebed warnañ da glask adalvije ur maes ken kontant... Ewid aoser ar pennad, martese awal'h ez eo un hufreer o klask izhould ensenn Utopia ? « Skridelezh kristen » : dias eo d'an den nac'h e stummdigezh judeu-kristen, ha gwashoc'h e vez c'hoazh pa fell dezañ ober evel ma vefe un danvezouer a-vihanig...

Sur eo n'hon eus ket « diviet » danvez ken fonnus al lizher-mañ, ha n'hon eus ket klasket henn ober. Salw ma roio c'hoant d'hon lennerien da brederiañ muioc'h c'hoazh war un divis hag a zo a-boues bras : pesort sossialism, pesort frankis ewid Breizh ?

Pobl Vreizh

Kenvrois ha keneiled, A-du, pe get, gant kement pennad-skrid embannet war ar gelouenn Pobl Vreizh, e rank pe heni gwelod ne chomit ket hanter-hent en ho stourm war dachenn ar yezh.

Ober gant ar brezhoneg zo kalz gwelloc'h eged komz ha skrivañ a-du gantañ (e galleg). Setu perag e talc'han da gass deoc'h gwerzh va c'homanant-bloaz da b/Pobl Vreizh, hag e lakan un tamm prof skoañz ouzpenñ.

Trugarez deoc'h, a galon laouen, da ziskouez tud mad an delc'ha veur a heni.

Alan Al Louarn, Roazon

Amañ e kavoc'h ur c'hennk 40 lur ewid bezañ komanantet da b/Pobl Vreizh. N'on ket gouest da skrivañ brezhoneg mad tre c'hoazh. Digarez ewid va Jasiou eta. Daoust m'emaon e Bro-Cembre ewid ur bloaerzh, kassit ar gasetenn e Breizh, mar plij, rag n'on ket re binwidig. Trugarez deoc'h ewid ho kelaouenn, plijus tre, ha dreistoll, kalon vad !

S. Le Moal, Perros

Trugarez a laromp ni iwe d'hon daou komanter, ewid o c'homzoù freizhous. Delc'her a rimp d'ober eus Pobl Vreizh, a gemerit ha ma c'hellimp, ur gelouenn vrezhoneg plijus da lenn, enni iwe, fiziañs hon eus, ur gentel bennag ewid stourm pemdezeg ar Vretoned.

Pobl Vreizh

Komanant da gelouenn c'hallig an UDB

**Le Peuple Breton** (service abonnements \*)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

a gass e gomanant  
Boutin : 40 L (1)  
Skoaz : 60 L (1)  
Estrenvro : 50 L (1)

(1) Distreiñ ar gerioù da anvijont ket

\* mention à préciser absolument

Amañ an arc'hant dre chekenn-boas (1) dre vandat-lizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2365-76

# POBL VREIZH

## PENAOE EMA GOUARNAMANT GALL PARIS É TISPENN EKONOMIEZH HOR BRO

Pinwidigezh ur vro zo, èlreson, diasezet àr an ekonomiezh anehi. Ur framm, ur roued eo honnañ, stank pe laosk. Ne faota ket torriñ un neudenn ag ar roued-se, pe e vo diframmet en he fezh...

N'eo ket Breizh ur vro ag ar re baourrañ : boud e c'hall magiñ he bugale, ha lod kàer arall ouzhpenn. Ar labour-douar hag ar pesketaerezh zo bet anehe, epad pell, an diw vronn a binwidigezh Breizh. An dalc'h n'eo ket ase ; an dalc'h zo n'hell ket Breizh boud mestr àr hec'h ekonomiezh...

E Paris, e Paris ataw, e Paris dalbez e vez gwraet ha disgwraet peb tra.

Gweled hon eus kement-se ged ar reus a zo en em gavet a-newez so azivoud peskerezh ar boued-mor a vez gwraet « grilhed-traezh » anehe : herwez ar Saoson ema red da vailhoù ar rouedoù boud laoskoc'h, a pa 'h aer da besketa ar grilhed-se en o « dourioù kevandirel », eged na vezont en dourioù Mor Breizh a aparchant d'ar Frañs. Reus, tailhoù da baeañ, goude m'o deus polised-mor Breizh-Veur lakaet o c'hrabanou àr bagoù pesketaerion Breizh hag àr o grilhed-traezh...

El ma welimp tuchant, n'eo ket difennet pesketaerion Breizh ged ar Frañs.

Mes distroomp da ekonomiezh ar vro, ha gwelomp e pessort stad ema.

Arlene eh eus bet krouet muioc'h a blassoù-labour, eh eus bet savet muioc'h a stalioù-labour, eged n'eus bet oaet d'an dias anehe... Neoazh, na boud ema sin vad un dra sort-se, n'eus ket awalc'h ag ar gounid-se ewid torriñ gwallenn an dilabour, a weler é kreskiñ ataw. Beb blé e ta ar re yaouank da glask labour àrlerc'h o studi, hag, ewid c'hoazh, ema stank ar re yaouank en hor bro. Ar re a zo etre 16 ha 20 vlé bremañ zo ganet en ur c'hourz ma tae ur bochad Bretoned

àr an douar beb blé. N'eo ket hañval stad an traoù bremañ. Mes eh omp c'hoazh ged ur rummad tud yaouank stank, achu o studi gete, ha mall dehe kavoud labour.

A du 'rall, ema bet krouet ar plassoù-labour-se e-barzh firmoù ha micheroù digustum ; arbenniget (ispialiset) meurbed ema an deknologiezh anehe ; krouet emaint bet iwe e-diabarzh ur frailhig dister, hag e chom arvarus amzer da-zoned plassoù-labour sort-se, diassur, bresk. N'eo ket digoguss an oabl ewid ar re a zo é labourad er plassoù-se...

Boud zo e Breizh, etal ar plassoù-labour éh omp é tihan komz anehe, tachennou ma seblante an amzer da zoned anehe boud digudenn. Ar stalioù da gempenn boued-mir da skwer. Ha neoazh amañ e weler na pegen brallet emaint bet. Stal Koat-Kàer Kemperle zo oaet d'an dias. Ged an elektronik ema ur sort : ema klezeñv Damokles e-pign a-us da benn kement heni a zo é labourad er stalioù-se. Bemdez e kresk an diasamantou ewid ar labourision-douar hag ar besketaerion. Lod-kàer a vagoerioù an ti a vez gwraet « ekonomiezh Breizh » anehoñ zo é voned d'an dias.

Kendelc'her a ra ar Stad C'hall ged he folitikerezh distruj ekonomiezh hor bro. Kemeromp ur skwer ouzhpenn : « adreizhet » ema bet roll prisiou an SNCF. Ewid un hed hañval (lakaomp daou-gant kilometr), ema bet kresket ar pris a 22% a pa 'h aer a Baris trema Breizh, hag a 8% hebken pa 'h aer trema harzoù ar Beljik. Red ema paeiñ ewid boud é chomel e Breizh...

Diskoueziñ a ra afer ar « grilhed-traezh » pegen nebeud nec'het ema ar Frañs ged ekonomiezh Breizh. Làred en deus ar ministr Le Theule da besketaerion Breizh e vehe rekis dehe doned d'henn gweled abred d'ar mitin, eraog seizh eur ! Dister eo an

istoer-mañ, gwir eo, ha boud zo si-riussoc'h. Dirag ar Saoson e ra gouarnamant ar Frañs èl Poñs-Pilat : golc'hiñ e zaouarn ha tenniñ àrdreñv heb ober mann. Pe selled trema ar CEE, ha 'n em deniñ a-ziar dro ar Vretoned. Un dra 'oa d'ober neoazh : komz ged ar Saoson, douzh o lakaad da blegiñ da interestoù ar Vretoned. Ema gwell ged ar Frañs koll pesketaerezh Breizh, a zo dister ewiti, na boud ema kreñv mat dre amañ. Ar aoter vras an Europ ema losket oanig Breizh ged ar Frañs, ma c'heller ober un oan ag ur pesketour, ag ar pesketaerezh. Ema ar Frañs é selled douzh ar pezh 'n em gavo e 1982 : europeanekaet e vo neuse rac'h moriou ar Gumuniezh Europead, da làred eo e c'hello peb unan a besketaerion an Europ Varc'hadour a-bezh, pesketa lec'h ma karo. Lec'h ma c'hello kentoc'h. E gwirionez ema ar Saoson (peskedus tre ar moriou anehe) é klask diskar pesketaerezh Breizh, re greñv ewite, hag e klaskont ober kement-se ged assant ha lesober ar Frañs. N'eo ket nec'het ar Frañs ged pesketaerezh Breizh, dister ewiti (ur wezh c'hoazh n'eo ket chalet ar Frañs ged an diskar hag an distruj ane-hañ...).

Ged ar Frañs kapitalour ha kreisenet, ged ar Frañs staget hec'h interestoù douzh re Stadoù bras ha firmoù bras an Europ, ged ar Frañs an heni e vez kasset d'an dias ekonomiezh Breizh, un tamm muioc'h bemdez.

N'eo ket possubl chomel kousket alkent, a pa weler ema ar pennoù bras é steuñvekaad, divorc'hed, distruj ur vro a anavomp mad : hon heni eo.

